

KANOENNOU

LANNIC AR MEN

deuz Goyen

*Kanomp ha meulomp Bretonned,
Breiz Izel om bro kared.*

*Mé gar ar mor, é darzou braz
A ra tro ar Bék ar Raz.*



H. Cadou
1915

Sôn Martolod Goyen

Var-tôn : CONSCRIT KASTEL-POL

Diskan

Nan né zeuz ket... nan né zeuz ket
Eun toulic ker brao é barz ar bed
Mé gar va bagou bihan, gat o lien ruet
Mé gar od guënn Trez-Kadec, a kan é laboussed

I

E barz é Goyen on mé gannet
Eur guër bihan é bro Kerné
Eur porzig môr gan om ni karet
Tré Raz a bro San Guénolé

II

Eur môr braz oll a teu da skéou
A da c'hliba dom ar douarou,
Méz eun dig kaër lédén a téou,
Gad ar Gambor⁽¹⁾ zraïlle an tarzou.

III

En o bagou a vez kléved,
Pa guz a éol var bord an od.
Moéchou ker splam ar vartoloded
A kan didius al labous od.

IV

Merried Goyen véz atao laouenn
Enved ven "Ar Pennou Sardin"
O bléo zo rodded var o fenn
Didan ar choéf brodiri fin.


V

Faz Plouhinec neuz douar flour
Zo karget a zanvez bara,
Carottéz ag ognon a pour
A zo dreist oll deuz ar c'haéra.

VI

An néb a garo zeï da Vourdel,
Da Vrest, da Bariz, da Kemper,
Evidon mé jomo da vervel
E barz Goyen bro va zud ker.

(1) Kerrek zo face da ben an dig



JAKEZ al LEZ, Esquévienn

Var tòn : **Chùlic ar vérvéro**

I

Jakéz al lèz zo von é roud,
Dour! dour! dour! dour! dou...rig!
Eur pôdig lèz varn horn é benn
A güenneg bet er chilétenn,
Dour! dour! dour! dour! dou...rig!
Jakéz éo pôtr an dourig.

II

Benn nom gav é Pompélégenn,
Dour! dour! dour! dour! dou...rig!
E ziskenn é foënneg Chan Bar:
Ag é lak an dourig é barz,
Dour! dour! dour! dour! dou...rig!
Jakéz zo béd é zouri.

III

E von en tranon gant ar Stiry,
Dour! dour! dour! dour! dou...rig!
Jakéz a chou, var bouez é benn
Vid ma gléo Chann ar c'hapenn,
Dour! dour! dour! dour! dou...rig!
Channik deuz da zouri!

IV

A barz ma vé deud bétek hêr
Dour! dour! dour! dour! dou...rig!
Jakéz neuz tou l é lèz güerzed
Ag ar hustum né neuz kéd pèd
Dour! dour! dour! dour! dou...rig!
Jakéz neuz mui tam dourig!

V

A neuzé teuz Jakéz dar guêr
Dour! dour! dour! dour! dou...rig!
Lungniêd neuz sac'h é chélétenn
Mêz raï ked toud da Philomenn
Dour! dour! dour! dour! dou...rig!
Güerzed mad neuz é zourig.

VI

Jakez en eur treuzi ar vorc'h
A éve eur banné dourig!
Mêz neo ked mui dourig ar stair
Mêz an dourig dour Vulnérair
Dour! dour! dour! dour! dou...rig!
Jakéz ranko dizouri.





Dale'homp mad d'hor Brezónnek
Vel birinnig d'har Gerek

L. A.

Goyen, Kezvu 1924.